



Philippe Delorme



Xavier Rozec



CC-Joackele

2011-2012 : bloavezh al logod-dall

En em vodet eo ar c'hevredigezhioù a ra war-dro al logod-dall en Europa evit lañsañ ar raktres «Asambles gant al logod-dall» («Together with bats» e saozneg) rak en arvar emañ al loened souezhus-mañ.

E-pad pell amzer eo kousket an dud. Brud fall a chomet dianavezet al oa warno gwechall... hag a loened-mañ dre ma vevont zo c'hoazh en deiz a hiziv diouzh an noz, pa vez Te, da skouer, hag un tamm aon 'peus rak al logod-dall ? Ha perak 'ta ? Al logod-dall ne reont droug ebet koulskoude !

Souezhus !

N'eus bronneg ebet all en Europa a vefe gouest da nijal evel ma ra al logod-dall. Divrec'h ha bizied o deus koulskoude. Ha gwelout a rez, e askell, ar vrec'h hag ar pemp biz ? Sell pizh : tost-kenañ eo ar biz yod ouzh an hini bras, ha ber-mat eo ar biz meud.

E brezhoneg e reer ivez « eskell-kroc'hen » ouzh al logod-dall !

Ur benveg ispisial a zo c'hoazh gant al logod-dall : o sonar. Er fri e c'hell bezañ. Hennezh a sikour da anavezout an trowardroioù.

Kas a ra trouzioù skiltrus anvet ultrasonioù. Te ne c'hellez ket klevout anezho. Raktal m'o deus stoket an ultrasonioù ouzh un dra bennak e teuont en-dro davet ar bronneged-nij da reiñ a bep seurt titouroù : pegen pell emañ ar skoilh, peseurt stumm a zo gantañ ha da beseurt tu emañ o vont. Gant sikour o sonar eo gouest al logod-dall da gavout boued, da chom hep stekiñ ouzh ar mogerioù pe c'hoazh ouzh an dud. Setu perak eo arabat dit kaout aon e tapfent krog ez plev !

Diaes dezho bevañ er bed a-vremañ...

A bep seurt amprevaned a vez debret gant al logod-dall, pezh a zo talvoudus-kenañ evit ingalañ an niver anezho. Met lakaet int diaes abalamour d'ar produioù pistrius implijet gant an dud er parkeier pe el liorzhoù, ha war an amprevaned war ar memes tro : dre forzh debriñ boued leun a broduioù fall e c'hoarvez d'al logod-dall bezañ klañv pe mervel zoken.


Brasañ kudenn al logod-dall

Bez e c'hellez sikour.


Gant da dud, da skouer, e c'hellez sevel lec'hioù-goudoriñ evit al logod-dall. Lod a zo aes-kenañ d'ober*. Bez' e c'hellez ivez mont da welout maer da gumun ha goulenn digantañ hag-eñ e

eo ne savont ket o zi o-unan. Toulloù er gwez, solieroù an tiez, kevioù... Kement lec'h sioul na vefe na re domm na re yen a vo mat dezho. Hiziv an deiz, pa fell d'an dud stankañ an holl doulloù a c'hellfe yenaat un ti o leuskel re a aer da dremen, pa droc'her gwez e-leizh da dommañ an tiez, n'eo ket aes d'al logod-dall kavout ul lec'h da c'houderiñ a-raok kaout o re vihan pe ul lec'h evit goañviñ.

oar petra eo an « Opération refuges pour les chauves-souris ». Traoù simpl a c'hell ober evit sikour al logod-dall war e gumun. Ne vo ket bep bloaz hini al logod-dall, poent eo kregiñ 'barzh !



Catherine Caroff - GMB



CC - Hlod Huskora / jessicall

Ne c'hell ket al logodenn-dall chom kollet en un milendall !

A-benn gouzout da belec'h mont ha chaseal e kas al logodenn-dall trouzioù skiltrus hag a zeu en-dro betek enni kerkent ha m'o deus stoket ouzh un dra. Gant se int gouest da c'houzout, hag int o nijal, pegen bras eo an amprevan a zo dirazo !



Josselin Boreau - GMB



Josselin Boreau - GMB



Josselin Boreau - GMB

Evit gouzout hiroc'h diwar-benn al logod-dall :

GMB - Groupe Mammalogique Breton - www.gmb.asso.fr - 02 98 24 14 00

<http://www.refugespourleschauves-souris.com/> (Evit sellout ouzh video Tregrom ha kaout titouroù)

* <http://lesecolo-espions.blogspot.com/2010/04/construction-dun-nichoir-de-chauve.html> (evit sevel un neizh)

<http://www.yearofthebat.org/bat-school/bat-activities/> (evit c'hoari e saozneg gant al logod-dall)

